

**Kempedenn** : Aotrou Doue, er Sakramant-se ken meurdezus, lezet hoc'h eus eñvor ho Pasion ; Roit deomp da zougiñ enor d'ur garantez ken divent kevrin ho korf hag ho kwad, ra c'hellimp degemer hep arsav frouezh ho tasorc'h. C'hwi hag a vev hag a ren, Doue geneoc'h hag get ar Spered Santel, a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

**Tantum ergo** : sacramentum veneremur cernui Et antiquum documentum novo cedat ritui  
Praestet fides supplementum sensuum defectui.  
Genitori, Genitoque laus et jubilatio, Salus, honor, virtus quoque sit et benedictio :  
Procedenti ab utroque compar sit laudatio. Amen !

**Letaniou** : Ra vo meulet !

**Kan-dibenn** : (hengounel bro-Wened)

Gloar, ô man Doue, d'ho karantez tener !	'Veit hor sekour, ha bout hor c'hoñfortañs,
A lein an neañv, C'hwi a zo diskennet.	En tabernakl e venn chom noz ha deiz,
E gwirionez, amañ, àr an aoter,	Diskouezomp dezhañ hor resped, hon doujañs,
Emañ geneomp Jezuz, Salver ar bed.	Diskouezomp dezhañ dreist-holl hor c'harantez.

Eñ a roa deomp, 'eit magiñ hon eneañv,  
E gorf sakret hag e wad prisius :  
'Eit e resev, bevomp santel ha glan ;  
En neañv, getañ, un deiz, ni vo eürus.



Overenn bep sul ketañ ar miz e chapel ar Werc'hez e KêrAnna da 10e30.

**Overenn da zonet : disul é tonet, d'ar 5 a viz Mae da 10e30.**



**Chapeled gloriüs** (skrivet get an Tad Maner)

**Kentañ mister** : Jezuz adsavet a varv da vev.

Er c'hentañ mister gloriüs, Kanomp meuleudi da Jezuz :  
Sevel a ra bev eus ar bez, Hervez E gomz, goude tri deiz.

**Eil mister** : Jezuz o pignat d'an neañv.

Jezuz, en eil mister a c'hloar, A zeu da guitaat an douar,  
Sevel a ra d'ar Baradoz, Eno emañ ouzh va gortoz.

**Trede mister** : ar Pantekost.

En trede mister me a wel, O tiskenn war an ebestel,  
Ar Spered-Santel eus an Neñv D'ober anezho tud nevez.

**Pevare mister** : Mari douget d'an neañv.

D'ar pevare mister, Mari, E-kreiz ar joa, ar veuleudi,  
Korf hag ene a zo douget, d'ar Baradoz gant an Aeled.

**Pempvet mister** : Mari kouronet

D'ar pempvet e voe kuronet Mari hon Mamm gant an Dreinded :  
En Neñv, Rouanez an Aeled, A gar bepred he bugale.

**Me 'gred e Doue**, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

**Hon Tad** hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv. Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion Met hon diwallit doc'h an droug.

**Me ho salud, Mari**, leun a c'hras, an Aotrou Doue 'zo geneoc'h.

C'hwi 'zo benniget dreist an holl gwragez, ha benniget eo frouezh ho korf Jezuz.  
Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit avedomp, pec'herion, bremañ ha da eur hor marv.

**Pedenn e dibenn pep dizenez** : O ma Jezuz, pardonit deomp hor pec'hedoù, hon gwarantit doc'h tan an ifern, kasit d'ar Baradoz an holl eneoù, ha skoazellit dreist-holl ar re o deus ar muiañ afer ag ho trugarez.

## Gousperoù

**Ô Rouanez karet an Arvor, Ô Mamm lan a druez, Àr an douar, àr ar mor Gouarnit ho pugale.**

1 Ho kalon 'zo digor 'Veit holl ar Vretoned ; An dud ag an Arvor Ho kar ivez bepred.	3 E labourioù kalet E tremen hor buhez : Doc'h pep droug, Mamm karet, Gwarantit-ni bembez.
2 Patromez Breizh-izel, Doc'hoc'h en deus rekour Ho Arvoriz fidel : Roit dezhe ho sekour.	4 Hor c'horf hag hon eneañ A c'hloastromp deoc'h get joe ; Ô Mamm a lein an neañv Sellit-ni get truez.

### Liderez ar gouloù :

V/ Man Doue, daet d'am skoazelliñ **R/ Aotrou, hastit dont d'am sikour.**

Gloar d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel 'Vel ma oa er penn kentañ, ha bremañ ha da viken, A gantvedoù da gantvedoù. Amen. Alleluia !

**Gwerz ar gouloù :** **Sklêrijenn lirzhin**  
(Troet a « Joyeuse **Splannijenn beurbadel an Tad**  
Lumière » A. Gouzes) **Santel, gwenvidik, Jezus-Krist !**

Tizhet geneomp penn an devezh, Oc'h arvetiñ doc'h sklaerder an enderv E kanomp an Tad hag ar Mab Ha Spered Santel hon Doue !	Dellezek oc'h e pep amzer da vout meulet Get bouezhioù santel, Mab Doue a roas ar vuhez, Deoc'h e toug gloar an hollved !
---	--

**Psalm 140 :** *Ra savo ma fedenn dirazoc'h evel an ezañs ; ha ma daouarn 'vel profadenn an enderv.*

Ho kervel a ran, Aotrou, hastit ma skoazelliñ  
Selaouit ma bouezh pa grian davedoc'h  
Ma fedenn da vonet betek ennoc'h 'vel moged an ezañs  
Ma daouarn da sevel 'vel aberzh an enderv.

**Aotrou, lakait ur gward doc'h ma genoù,  
ur gedour doc'h dor ma muzelloù.**

**Na zougit ket ma c'halon da zrougobere**

**Na d'en em reiñ d'ar fallagriezh.**

Biken ne dañvain ag o flijadurioù :

Pa skoyo genin un den reizh e vo din ul levez, e  
Met eoul ar re fallakr ne skedo ket war ma blev,  
Rak bepred e pedin a-enep o fallentez.

**Pedomp :** Benniget oc'h, Aotrou hon Doue, C'hwi hag hoc'h eus roet d'an dud splannder ar gwir sklêrijenn a gas ho Mab. Ar sklêrijenn-se eo he deus santez Anna degaset el lec'h-mañ a GêrAnna. Grait ma vezimp bepred muioc'h tier a sklêrijenn ha degouezh un deiz e splannder ho kloar. Dre Jezus-Krist, hor Salver.

**Hon Tad :** hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv. Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion met hon diwallit doc'h an droug.

### Kempedenn

<b>Kan-dibenn :</b> Rouanez an neañv, kemerit joe, Alleluia ! Alleluia ! Rak ar frouezh ag ho tigestez Alleluia ! Alleluia !	A zo savet bev ag ar bez, Alleluia ! Alleluia ! Pedit 'veidomp an Aotrou Doue, Alleluia ! Alleluia !
---	---

Deoc'h, Gwerc'hez, joe ha levez, Alleluia! Alleluia! Jezus 'zo savet ag ar bez, Alleluia! Alleluia!



**Azeulerezh :** (hengounel bro-Wened XVIIIvet kantved)

1 Adoromp holl, er Sakremant ag an aoter,  
Un Doue kuzhet, Jezus hor Mestr hag hor Salver !  
Get hor bouezh, hor c'halon, hon oberoù santel,  
Meulomp ervat un Doue a ziskenn ken izel,  
A ziskenn ken izel !

2 O ma Jezus, aveit reiñ deomb gwir koñfortañ,  
C'hwi 'n em laka bemdez dindan an aparañs,  
Plijet geneoc'h reiñ deomb holl ho tonezonoù,  
Ha skuilhiñ àr ho pobl ho pinvikañ grasoù,  
Ho pinvikañ grasoù !

3 Aeled an neañv, amañ diskennit, m'ho kouvi,  
Dait da sekour kaniñ da Vab Doue meuleudi ;  
Gloar ivez d'an Dreinded, tri person en un Doue,  
Gloar bremañ àr an douar, ha gloar bepred en neñv,  
Ha gloar bepred en neñv !

**Eil kantik** (hengounel bro-Wened)

Ni Ho ador, Hosti sakret, C'hwi zo 'veidomp un Doue kuzhet, Ennoc'h, Jezus, dre garantez, Zo korf, eneañv, gwir den, gwir Doue.	Ni Ho ador, Gwad presius, Diverret a vambrou Jezus Aveit gwalc'hiñ hon eneoù Kousiet dre hor pec'hedoù.
--	--

É sakrifis an overenn,  
Jezus hor Salver a ziskenn,  
A renevez àr an aoter  
Ar sakrifis ag ar C'halvar.

**Kan-digor : Alleluia ! Enor da Zoue! Kanomp uhel get levezet ! Daet eo Jezuz bev ag ar bez !**

1 D'ar sul vintin, da c'houlou deiz  
An disiplid lan a dristet  
A dostaas da welet ar bez.  
2 Eürus ar re en deus kredet  
Daoust ma n'o deus ket gwelet !  
Eürus 'vint en neañv da berped !

3 En deiz gouel-mañ get levezet  
A vouezh uhel kanomp da Zoue  
Gloar, meuleudi ha trugarez.  
4 Lâromp get izelded-kalon,  
Get karantez, get devosion :  
Bennozh da Zoue ha melasion !

**Psalm 109 : Àr-lerc'h ar sabbat, Mari a Vagdala hag ur Mari arall az as betak bez Jezuz.**

Doue an Tad en deus lâret d'e Vab, ma Salver : Azezit en tu dehoù din,  
Betek ma tiskarin hoc'h eneberion dindan ho treid.

**Doue a lakay ho kelloud da splanniñ a Sion,  
ha c'hwi a vo ar mestr àr holl hoc'h eneberion.**

Ar gelloud ho peus a-viskoazh a vo gwelet an deiz diwezhañ e-kreiz gloar ar Sent;  
c'hwi a zo Mab din, kent ne oa c'hoazh netra kroueet

**Doue en deus er grataet, ha eñ a zalc'ho doc'h ar pezh en deus lâret :  
C'hwi a zo beleg da virviken hervez lid Melkisedek.**

Emañ Doue a zehoù deoc'h, ha deiz é gounnar  
e tiskaro ar rouanez a zo a-enep deoc'h.

**Eñ a varno an holl pobloù hag o zaolo d'an diaz;  
eñ a flastro àr an douar pennoù ar re fall.**

Eñ en devo, e-pad e vuhez, e walc'h da c'houzañv ;  
rak-se e savo e benn a-dal d'e eneberion.

**Gloar d'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered Santel  
'Vel a holl-viskoazh, bremañ ha da virviken. Amen.**

**Psalm 113 :** Dait ha gwelit al lerc'h mar bez lakaet korf ar Salver, Alleluia !

A pa 'z as pobl Israel er-maez ag an Ejipt / ha ligne Jakob a-vesk ur bobl barbar : .

**Doue a gemeras bugale Juda d'e servij / hag e savas e rouantelezh e Israel.**

Doc'h o gwelet, ar mor ruz a dec'has / ha dour ar Jourden a zistroas trema e vammenn.

**Ar manezioù a sailhas avel deñved / hag ar motennoù avel oaned .**

O mor, perak e tec'hes-te ? / ha te, Jourden, perak e tistroes-te trema ha vammenn ?

**Manezioù, perak e sailhit-c'hwi avel maouted ? / ha c'hwi, motennoù avel oaned ?**

An douar en deus krenet dirak Doué / dirak Doue Jakob,

**En deus tennet dour-red ag ar maen, / ha troet ur roc'h da vout fetan.**

**Gloar d'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered Santel/Vel a holl-viskoazh, bremañ ha da virviken. Amen**

**Kantik Eured an Oan :** Ar salvedigezh, ar gloar hag ar gelloud d'hon Doue : Alleluia !

Gwirion ha reizh e varmedigezhioù : Alleluia !

Meulit hon Doue, servijerion an Aotrou : Alleluia !

C'hwi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras : Alleluia !

Setu ma ren 'vel Roue, an Aotrou hon Doue, Mestr an hollved : Alleluia !

Bezomp laouen ha tridomp, roomp gloar dezhañ : Alleluia !

Rak setu daet eured an Oan : Alleluia !

Hag e bried a zo en em gempennet : Alleluia !

**Komz Doue** (He 10, 12-14)

*Ar C'hrist, goude bout kinniget aveit ar pec'hedoù ur sakrifis hepmuiken, a zo aet da azeziñ aveit atav en tu dehoù da Zoue, o c'hortoz hiviziken ma vo lakaet e enebourion da skabell dindan e dreid.*

*Rak dre ur brofadenn hepken en deus peurwellaet da viken ar re santelaet.*

**Respont :** **Setu an deiz a reas an Aotrou, deiz a levezet !**

V/ Pbloù, skedit get levezet, setu Pask an Aotrou

Setu an deiz m'hor c'has ar C'hrist, hon Doue, ag ar marv d'ar vuhez.

Gloar d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered-Santel.

**Kantik Mari :** Gwelet en deus Tomaz an Aotrou Doue : kredet en deus.

Eürus an Hini a gred hep bout gwelet anezhañ. Alleluia !

**Magnificat ! Magnificat ! Anima mea Dominum !**

1 Meulin a ra m'ineañv brasted an Aotrou Doue / D'an Aotrou Doue hepken e lâran trugarez.

**2 Get man Doue, ma Salver get nerzh e garantez, / Ne bad mui ma c'halon, sailh a ra get ar joe**

3 A lein an neañv e sell izelded e vatezh ; / Rak-se e vin galvet eürus er bed a-bezh.

**4 Traoù kaer en deus graet din an Hini 'zo uhel ; / Ra vo da virviken meulet e Anv Santel !**

5 E vadelezh hep par e-keñver ar re vad / A heul hep skuizhiñ a rummad da rummad.

**6 E-keñver ar re fall e gounnar 'zo spontus ; / En un taol e tismant o soñjoù rondonus.**

7 Get ur ger e tiskar ar rouaned uhelañ ; / Àr an tron e sav tud ag ar stad izelañ

**8 Reiñ a ra d'ar c'heizh-paour madoù get largetez :**

**Hag e losk ar pinvig da gouezh er baourentez.**

9 Doc'h Israël e bobl en deus erfin truez ; / Ag e vadelezhoù en deus soñj a-nevez.

**10 Soñj en deus ag an traoù en doa grataet 'vit mat**

**D'hon tud a rumm da rumm ha d'Abraham hon tad.**

11 Gloar d'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered-Santel/Da Zoue e tri person ra vo gloar peurbadel!

**Erbedenn :** Pedomp an Tad hollgelloudek hag en deus roet deomp buhez e Jezuz dasorc'het :

**R/ Amen ! Amen ! Alleluia !**

Dre veuleudi Jezuz-Krist àr ar groaz : - dedennit davetañ razh an dud.

Get treizhad ar C'hrist a-dreuz dourioù ar marv : - gouarnit feiz ar re nevez-badezet

Dre drec'h an Hini dasorc'het àr nerzhioù an droug : - gwarantit ar pobloù ag ar feulster.

Dre donezon ar Spered unel da geñver nozvezh Pask : - grait ag ho Iliz sin an unvaniezh.

Dre sakramant korf ha gwad ho Mab : - ra lodenno hor breudeur tremenet ho tasorc'hidigezh.